

6 (16)

DISPLIJADUR UR PERSON,

EMIGRET E BRO-SOZ,

Adresset d'e Vatez

LAURANÇA.

DISPENSARY TO PERSONS

EMIGRETT & BRO-SON

Address in the Union

MANUAL

DISPLEIJADUR

UR PERSON,

EMIGRET E BRO-SOZ,

Adresset d'e Vatez

LAURANÇA.

PA'meus qüittèt ar Franç, me a meus qüittèt oll ;
Mes o coll Lorança, e meus grèt qer bras coll.
-Ah! güella tamie plac'h, va Doue, e voa hi !
-Pegument voa soignus da guempen mad va zy !
Neuze certenamant ne yenn qet gant John Soz,
Evit va zri güennec, ha rancout e'hoas gortoz,
Da dy ur e'hos hostiz hac un hostizez lous,
Galousien meurbet vil, ha daoulagad picous ;
Nan... ne yenn qet gant hast da zëbri un tam boed,
-Souben an tri-draïc, qig ranç ha bara loued.
Oh! nan, ... em presbital, evit compagnunez,
-Lorança, me en tou, na bertmetje james
Ec'h antreje em zy ar ganailles falla
A rouantelez Soz, hac ar re distera :
Cocher ha dicrotter, maçonner, savater,
-Gant o bragueyer lous o flêryus davancher ;

Tud hep nep seurt respet, hac a gret gant odaç,

-O tont da c'huitellat, em c'hever' qemer plaç!

-Breugueudi a reont evel moc'h etrezê;

-Hac ouspen-ze, mêvar! e sònjont marteze

-E zeo din-me, michañç, cavout goal enorabl

Beza ouz taol azeet gant tud qer meprisabl!

-Mar pris unan anê sellet pe gomz ouzin,

-E lavaro gant foei, en eur serri e vin:

-*Goddam! Franch-mann*, ro deomp buan pebr hac holen,

-Pe me foëltro diouc'h-tu va scudel gant da benn.

Qerqent, m'en em laqa d'o zervich prim ha pront,

Hac oun evurus bras, m'oc'h assur, mar prizont

-Dont da lavarat din : *Thank you*, paour qèz bêleg,

En eur serri o dent hac anter clòs o beg.

O va Lorança guèz! pelêc'h e ma'n amzer

Ma vije deut seurt tud vardro va fresbyter,

-E pije, hep dale, gant troad da scubelen,

Disqet dezo ervad respeti soutanen!...

Te pije lavaret dê : « Houss! vil forbanet,

» Ne zoc'h, etrezoc'h oll, nemet cos paganet :

» Sònjit ervad penaos atao va Ferson qèz

» Voe enoret en kær qercoulz ha var ar mèz. »

Ia, Lorança guèz, te pije sur neuze

-Foëltret buan da droad e traòn qein an dud-se.

-Oh! Lorança, ne ràn bremâ nemet hirvout :

-Va c'haloniè em c'hreiz a zònc'h bemdez ennout.

Nac a boan a zouffràn var bord a c'hoec'h vloas zo,

Qer pell diouzit-te hac ivez eus va brô!

Va muzellou dizec'h a lippàn alies,

Pa zònjàn er frico gueachal din a rès.

Bemdez vije güelet ur yar, ur c'habon lard,
Qefeleg, pe glujard, pe dindonç, pe canard
-Staguet demeus ar c'hroc ganes-te, Lorança,
-Evit ellout donet ervad d'en em bleustra.

Sònch ac'h eus, Lorança, e res din avichou
-D'al lun ha d'ar merc'her un dijuni stripou,
A vije arouzet gant ur pintad güin güenn,
-A deue alies da scànvaat va fenn,
Ha gant pez plijadur e rès din-me goechall
-Debri ur pez bêvin a biques gant qig-sall?
-Hac ar ragout qer mad, e pini voa piz glas!
-En eur sònjâl hepquen e sântàn c'hoas ar vlaz.
Na peguer delicat e vouies, va matez,
-Prepari din qer brao frigoussen patatez!

Oh va brô guèz Castel, ha te ivez, Rosco,
Pelec'h e-mâ, allas! bremâ da articho,
Da garotez, col-fleur, asperges, patatez!
Pelec'h e-mâ, dreist oll, Lorança, va matez!...
-Ia, Lorança voa güella qêguinerez
Adalac kær a Rom bete kær Montroulez.

Paourez qèz Lorança! pez plijadur, goechal,
-A vouies ober din, pa vijes o farçal,
Euz va güelet joaüs diouz an daol azeet,
O têbri ar frico a poa din servichet!

Oh, Lorançaic qèz! na te c'heus bet chagrin,
Pa zout deut da zònjâl e vanq din amâ güin!
Rac, allas! en Brô-Soz n'eller caout Yan-Vourdel
-Nemet rat bras meurbet hac evit pris huel.
Te po sur lavaret : « En defot eus a win,
» Va Ferson qèz a zo marvet gant ar chagrin.

- « Ar c'hèz-Doue a voa ganet goâl delicat,
-« Hac ur bannac'hic güin a rè dezàn calz' vad.
-» Abaoue pell-amzer n'elle a grenn cousquet,
-» Ma n'en dije arauc ul loupennic evet;
» Mes hirio, va Doue! pa deu dezàn da vanq,
« E tle,,allas! beza e galonic goal blanc.
-» Penos ellout miret na fraillfe e galon?
» Ret e ve sur dezàn nonpas beza Person... »
-Nep piou benac a gred c'hoarzin-goab ouzin-me,
O tespeigni mercou demeus va c'harante
Evit ur plac'hic fur a garàn dreist peb tra,
N'anavezont qet sur va matez Lorança.
Anter-cant vloas e d'oa ha pèvar en tu-all,
-Ar pez a dle, michanç, berrât an téodou fall.
Serret em boa o beg da dud leun a valiç:
-Beza e d'oa an oad a bermet an Ilis.
Lèzit-ta ac'hanòn, va lèzit, tud mechant,
Da vouela Lorança herves va zantimant.
-Perac, calonou fall, e cafec'h-u abec
Er garantez güirion en devezs eur bélec
Evit e vatez vad?... Permetet è deomp-ni
Qemer matez d'ober ar zervich en hon ty.
Biscoas an esqibien en o mandamantchou
Na zifenchont deomp-ni da gavet avichou
-Ur vatez qempen mad evit hon servicha;
-Rac-se, clozit ho peg, tavit da rebacha.
Goechall, er c'honcilou, pa gomzjot ouz matez,
Na entetet qet comz eus va Lorança guèz.
-O pebes calonad e devezo-hi bet,
-Pa vezo deut dei sonch er stat ma' zoun rentet!

Humiliet hirio gant tud fall, canaillez.

-Hac o souffr, pell diouz Franç, a bep seurt dienez!

-Cousqet goal fall meurbet en ur c'hos caborel,

-Hep na'zeus dindannon ur vojadennic pell;

-Hep nep tam sel ebet, hep ur billen ridos,

-Eno eo e cousqan, Doue a voar penos!

Var ar c'hôlo hepqen, hep un tam oriller...

Oh! neo qet evelse e zoan em presbyter!

Lorança guèz! m'em boa eno ur güele plun,

-Hac a voa meurbet soubl, mar boe biscoas nicun.

-Eus a betra eta e zeo-én deut bremâ!

O va Doue! plijet en renta din amâ!

-Peguer brao, Lorança, e rès-te va güele!

la sur, te er grê dign demeus eur C'hure.

-Ne gouscàn tam ebet'bars em güele calet.

-Mar moredàn, e zòn gant un ure spontet.

-Paourez qèz Lorança! calonic un Doue!

-Petra a lavarfes, ma velfes ar güele

Ebars pehini oun bemnos en em grafat

Qer crèn, m'en em rentàn oll rusiet gant va goad;

Petra a lavarfes, ma velfes al logod,

Ar melc'houed, ar razet o tont varnòn d'an drot?

-Deus ive da velet hac al laou hac ar c'hoenn

-Dre oll a vojadou var va c'horf o pourmen.

Petra a lavarfes, ma teufes d'am güelet,

Hep va femp tapis gloan hed ar gouân calet,

-Hep cavet casi mann da ellout va golo,

-Nemet un tamic foenn hac un tamic colo;

Laqat a ràn ive da domma va zreid qèz,

Va c'hos habidic paour hac ivez va braguez.

Allas ! Lorançaïc , petra' lavarfes-te ;
Lavar din un nebeut , ma velfes da Gure
-Pleguet var bord eul lenn , hac eno gant poan vras ,
-Hep ur vruzunen saon , mes a dolliou colvas ,
O clasq goalc'hi ervad gant poan e zillat fanc ,
-O laqat da zec'hi dilastre ouz ur branc ,
Evit , d'ar zul vintin , caout propr e surpilis ,
D'ellout modestamant asista en ofiç .

Ia ! m'am güelfes , te , gant va c'hos boutou coad ,
-Lorança guèz , petra e ve da galonad !
Ha ma velfes , dreist oll , tud a Ilis a stoc
-Oc'h ober niver traou na rent qet diaroc ;
O ticroti gant soign o-unan o boutou ,
-Hac oc'h oza memes alies o bragou ;
-Traou a rencont d'ober , gant un nebeut a vez ,
En defot a arc'hant ha demeus a vatez .

Deus d'am güelet amâ ; antre em paour-qêz ty ,
Hac e veli petra hon deveus da zebri :
Sell hagén na dle qet ur seurt coan , ur seurt lein
Laqat hor c'halonou da antren en hor c'hein !
-A vec'h e servicher un tam boed var an dol ;
Bemdez hor bez' panez , pe patatez , pe go !
-Va diadreic paour zo qignet gant ar scaon ,
Va estomac a gri cré venjanç var an naon .
Oh ! ma velfes eta gant pebes ear mesqin
-Strouillennou Saoz a ra deomp-ni hor c'heguin !
-N'eus nemet glaou-douar , ne'zeus qet a gueuneud ,
Pe ma ellomp-ni caout e zeo atao nebeut .
N'hon eus qet a zoufflet , ni c'houez gant hor guinaou ;
Coulz ebars el ludu hac ive var ar glaou ,

·Ha gant qement a nerz e rencomp en ober ,
·Ma teuomp da zifonç , sivoas , hor bragueyer .
·Afin , dre fors c'hoeza an tân dindan ar pod ,
·Eza hor zouben baour qen a danfoëltr d'an drot ;
·Strincal a ra en tân , qement' ra o saillat ,
·Hac hep ecumouer ez eo ecumet mat .
·Cochard qerqent neuze , a dol er pod holen ,
·Irvin , pour , carottez , ha diou pe deir golen ;
·Neuze gânt e zaouarn e patouill an draze ,
·Hac e lip gant joa vras e viziet goude .
·Hep donet da c'houzout hac ar zouben zo mad ,
·Eo devoret dija eno gant peb lagad .
·Hac e tlefe'r zouben beza c'hoas anter cri ,
·Creizde a zôn... alôn , ret ê deomp e débri .
·Hor bouzellou a gri : débromp , débromp souben ;
·Débromp buan eta . Goas a ze ma yanc den .
·Neuze , hep dale pell , hac en ur ser-lagad ,
·E zeo lounqet ganeomp , pe hi zo fall pe vad .
·Evit an tamic qig , ne' zeus qet d'en espern ,
·Grigônchet eo diouc'h-tu coulz evel an esqern ;
·Ha pell da filbouchat' vel ar pesqet er môr ,
·E leinfemp un eil güech erru etal an nôr .
·Ha possubl eo leina , Lorança , hep café ,
·Ur banne jigoden hac un tamic paste !
·Sônjal a rêr , michanç , n'hon eus qet a rêson
·Clasq dont da zoulaji un nebeut hor c'halon !
·O va brô qer caret , va farros , Lorança ,
·Hac evelse goechal em boa-me da leina ,
·En amzer qen eürus eus va oll jouissanç ,
·Em parros , en Breiz qer , caëra contre a Franç ?

- Gouscoude, va Doue! e zeo c'hoas ur boneur
Ellout caout ur repu en amzer a valeur;
-Rac anes au hini hon eus bet e Brô-Zos,
-Mardouchic! pell a zo ez oa hon reor er fôs.
-Mes, lèzomp an draze... Pignomp d'ar c'halatres
Da velet ar gourach coulz evel an adres
A zisqib Sant Cripin, pleguet dindan e stol,
Güelet a rër eno, autrou Person *Marol* :
-(Rac potret Sant Cripin a hanv ur stol ur scleuq,
-Evit rêi da entent sclêramant da Yan Gleuq.)
-Pebes dudi a zant pa vani e dranchet!
-E. troc'h ur zol ervad, ec'h arranj ur rivet!
-Ha gant pebes adres e tremen e reunen
-Ar brava a ouffet e beg e ligneulen!
-Ha prest ha pront qerqent m'en deveus bet toullet
-E zol hac e rivet gant un tol minaouet,
E chass en eur gana, hac e regl e boentchou,
-En eur scrigna e zent, a nerz e grabanou.
Cana ra var e scaon, bemnos ha bep mintin,
Ur ganaouen benac, qer guyê hac ur pincin.
-Diret, Lorança guèz, da velet *Grebuchon*
Oc'h ober, güella m'ell, var ar furm ur chosson;
Rac Bèleyen Franç eo a ziscas ar voyen
D'ar Zozon da ober chossonou lizieren.
-Yan-Zoz a gar ive en em zervich outê,
N'oun qet pe dre gapriç, pe dre utilite,
-P'evit rêsoniou all; mes na fors zo deomp-ni?
-Prèna brao a reont, ha paea pepini,
Ispicial pa deu an erc'h, ar yenien,
-Hac an amzer glaoc da c'houlèn boutou prenn;

Rac, ar grizill, ar frim, ar glao hac ar gurun,
Hor zicour avichou da ober hor fortun.

Hac evit amzer gaër james ne c'hoantaomp :
Seulvuia e vez fall, seulvuia e werzomp.

Hanavezet oc'h eus, michañç, Person *Bodral*?

Ar paour qès maleürus a guez e amzer all ;

Ar c'hèz-Doue a zo qer douç evel un oan,

Hac a zouffr paciant un niver bras a boan.

Na peguen drol e zeo gant e vestennic bër,

Gant e voutinezou hac e gos bragou lër !

Gouscoude e zeo sur, m'en tou, qemener mad,

Mes preferi a ra e gòf paour d'e zillad.

E viqel zo meurbet eürussoc'h eguetàn,

Ha gouscoude en deus eveltàn calz a boan ;

Ober a ra bemdez tamic scoliouigou,

Ha qer douç eo atao ouz e vugaligou,

Ma ell trap avichou, qent ma vez fin d'ar blèa,

Ur güenneguc benac hac en laqa en joa.

Cléo, va Lorança guèz, c'hoas detaillouigou :

Amà e rër ivez avelouerigou,

A zervich da frescât bizach ar Zozezet ;

Ur pez an utila, ha precius meurbet.

Te ne' poa qet ezom güechall em presbyter,

Lorança, e nep tra caout un avelouer.

Me'meus güelet amà pêvar mignon béleg,

O c'hounit d'o ober, assur ; meur a wenneg.

Anan a faoute coat demeus an Inizi,

Ha gant ul limic douç o laqe d'ajusti ;

An all gant calz a c'hout, evit o renta coant,

O goarnisse gant soign a damou olifant.

-Ar vicher-ze a zo ha profitapl ha mat,
Ha n'ouzòn qet perac e zint deut d'e güittât.
-Oberour avelouer pe un apotiqr
Zo, hervez va speret, cazir memes micher,
Rac ur frescadurez, m'en assur, n'en deo qen,
Qemeret dre araoc pe roet dre adrén.
-Nemet e vo bevet atao honestamant,
-Qement micher a rêr zo mad certenamant.
Me a garfe ivez ober unan benac ;
Mes, caër a meus essât, ne ouzòn qet perac
-Ne deuan qet abenn james eus a netra :
Hep injin oun eston ha feneant un dra ;
Ha caër a meus ivez, goude ma' meus essêt,
-Na ellàn ober mann evel ma' zeo dleet.
-Penos e counnerràn eus va zestinadur,
Pa velàn ne' meus qet ivez ar blijadur
-Da c'hounit avichou un nebeudic arc'hant,
-Evit ellout qemer un tam soulajamant !
Güelet a ràn amâ hac a voar tressi plous,
Da ober tocou brao güernisset a voulous,
A werzer pris huel da zemezeléd Soz,
-Hac o rent qer coantic evel ur boqet roz ;
-Beza e zeus darn all hac a ra poltrejou,
Darn all hac a bint fleur evit ar merc'hejou :
Oll e c'houzont ervat tenna dour d'o melin,
En eur laqat hep cess en uzach o injin.
-Mes me, paour qèz yan-zot ! sotoc'h egueto tout,
-Ne' meus qet ellet c'hoas dont abenn da c'houzout
Dont da ober ervat ur paour qèz chapeled
Hac a dalfe ar boan evit beza güerzed ;

Mes, pell da zont d'ober ur vicher vad benac,
Evit ellout crévât va zamic estomac,
Ne'meus nemet an tiq d'ober paour qèz rimou,
An treuta, m'en assur, eus an oll vicheriou;
Ha ne ràn cazi tra, epad va oll amzer,
Nemet o c'houch dre renq ha gant poan var baper.
Calz a rimerien paour zo gèapêt alies:
Oh! clêmomp anezo, o micher zo dies.
-Mes n'eus fors, goude oll, pa ràn reflexion,
E zeo ret dîn ivez caout ur vocation.
Petra vezin-me-ta?... Güerzer alumettez!...
Foëi!... a lavaro darn : N'oc'h eus-u qet a vez?
Petra eta fell deoc'h, ha perac va zamall?
Qemeret eo bremâ an oll vicheriou all.
Na veler tro vardro ebars en oll stalliou,
Da baqat traou nemet paper leun a rimou.
-Amâ abat *Chicard* a verz blonec, qig-sall,
-Abat *Finault*, butun, patatez ha traou all:
-Pepini en em denn eus a zindan e zam;
-Anfin, an oll amâ a glasq gounit e dam.
Dre oll eus o staliou ec'h ellit mad güelet
Un anseign paper güenn var bini zo scrifet:
Amâ e vez cavet drogach eus a bep sort,
Evit arc'hant pe aour, coulz d'ar c'ham'vel d'an tort.
Mes, ma carfen ivez, ha ne alfen-me qet
Qercoulez hac int-i oll clasq beza implijet?
Sot avoalc'h oun, assur, eprouv an dienez,
-Pa elfen-me qer brao güerza alumettez!
Ha na chomfe ganén evit va oll brofit
Nemet c'hoeczek güennec bemdez : additionit,

- An draze a rafe just hep mis ul lous-aour,
Ha n'en em gredfen get sur neuze beza paour.
Mes, perac beza bet qer divezat sònjet?
Me grede e voan fur. Oh va faour qèz speret!
-Ma vije, a gredàn, bars em plaç un Normant,
En devije pell zo destumet calz' arc'hant...
-Peoc'h aze, têodic fall, ha serrit ho qenaou,
-Rac me a vel unan a zo eus va zelaou.
Nac evit pezh rêson e clasqfen-me affer
-Ouz tud leal ha fur a ra mad o micher?
-Ha ret e zeo din-me, enep d'am ordinal,
-Clasq cos troidellou, elec'h dont da farçal?
-Mes farçal! mes c'hoarzin!... Oh! pebes ser-galon
Da Lorança, o sonch en e faour qèz Person!
-« Oh! emei (o stlapal en êr he lunedìou,
-Hac éncrezet meurbet, o leusqel hirvoudou),
» Ha possupl ve eta va Mestr, va Ferson qèz,
» Reduizet da veza güerzer alumettez!...
» Ha beva' ràn-me-ta evit ur seurt affront!
-» Maro cruel! dired d'am c'hemer prest ha pront...
-» Va Mestr! va Ferson paour! ur penn eus an Ilis,
» N'en deus, nemet a boan, da zul, ur surpilis!
-» Ha ràncout, an den qèz! evit gounit e voed,
-» Donet c'hoas da verza pacajou coad souffret!
-» Eur c'hommerç meurbet treut; ia, ur goal vicher,
» Ebars pini ne'zeus nemet poan ha mizer.
» Ha possupl ve dezàn beza etal un nor,
-» Evel ur reñseudic evit goulén digor,
-» Da offr da dud an ty, hac én ruz gant ar vez,
» Gant un êr truezus, e oll alumettez!

Oh! pebes goal lamp fall en deveus-én bet grêt!
Deomp buan da Vrô-Zoz... Ne vimp qet re abret.
Güerzomp tout evit caout un nebeudic arc'hant;
N'eus fors ouz nep danger; ambarcomp en istant.
Va Ferson paour a zouffr... Netra amâ n'am dalc'h.
Na ouffen birviqen beza abret avoalc'h. »
-Ah! güella calonic e deus Lorança guèz!
la, meritout ra certen beza mestrez.
Nan, biqen na elfen dont da ancounac'hât
Ur plac'h bet evidòn e peb amzer qer mäd,
-la, Lorança guèz, n'espèt d'ar fals tamal,
atao e Javarin : Harrao d'an tédou fall!

F I N.



E Montroulez, e ty LÉDAN, e traòn ru ar Vur.

